

# DOUE HA BREIZ BEPRED



## KOUSK BREIZ-IZEL

An heol a zo ku - zet, se - tu e - chu an  
de ; Me glevarc'hloc'h o tin - tal an A - ve. Kousk. kousk, Breiz  
I - zel bro dis - par, se - tu an noz o tont war an dou - ar.  
Kousk. Breiz I - zel, bro ker mad, Trouz ar mor bras a zav d'az  
lus - kel - lat.

C'houez-vad an ed e bleun hag al lan alaouret  
War ar mesiou gant ar gliz-noz a red.

Ar vesaerien a gân o testum o loened ;  
Gwersiou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traoniennou didrous me glev kân an eostig ;  
Tellenner-noz, sonit flour ha dousik.

'Us da Vreiz o skedi an nenv steredennet  
A lar 'z eus eun Doue ouz hor c'haret

An nep a c'houez bemdez a c'hounid e repos,  
D'an dud vad Doue en deus graet an noz.

Arvor, ô douar sakr, a greis kalon m'ho kar,  
Bro all ker haer n'eus ket war an douar.

(J. MARÉCHAL).